




Bleun-Brug ar pardonioù, amañ e Lokronan, a vo eur mor a gan
d'an 2 a viz Even 1957.

PHOTO JOS LE DOARÉ

BLEUN-BRUG

Niv. 100 (Mizieg-Mensuel)
Koumanant - Abonnement : 500 fr.

EVEN 1957

TAOLIT EVEZ MAD

Kasit 500 lur (800 lur koum. a enor — 1.000 lur koum. madoberour) da :

Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes.

C. C. P. 1541.90 Nantes.

Kas ar skridou da : Abbé Bleunven, curé Saint-Renan (Fin.).

Mar fell deoh beza ezel euz ar Bleun-Brug pe rei deom skoazell, kasit ho skodenn da :

V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist.,

C. C. P. 544.22 Nantes.

Ezel : 500 lur. — Madoberour : 1000 lur.

TAOLENN

Mari, Mamm ! gand P. Batany	1
Alvokad an Alvokaded, gand Ricardo Palma	2
Eur Breizad er Stadou-Unanet kant vloaz 'zo : Henri de Courcy (1820-1861), gand B. a Germorvan.....	4
Eur wal droiad pesketèrèz, gand Job Seite.....	7
Tougn, ar hi koz, gand Yann Gorrigan	9
Korn ar Merour, gand Gab ar Moat	11
Saout Lambaol. Bioh Karling ! gand Mab an Dig	12
Ar brezoneg er Skol, gand J. J.	17
Keleier	15
Geriou-kroaz	16

DEVEZ AR BREZONEG

Abaoue 1952 e vez greet, beb bloaz, e strêdou or pemp departamant, eur gest evit skoazella ar brezoneg en oll skolioù ar vro.

Ar bloaz-mañ e vo greet d'ar Yaou-Bask, 30 a viz Mae : spilhennoù a vo gwerzet.

Er Huzule-meur a zo bet savet evid ober war-dro an Devez-se, e kaver eun niver braz a dud a beb stad : pennou-braz ar politik, an Iliz, an Armé, an Deskadurez.

Renet e vo ar Huzul-ze gant an Aotrou Andre LE TROCQUER, Prezidant an « Assemblée Nationale », depute ar Seine.

133849



mari, mamm !

Mari, mamm ! Mamm Jezuz, hag or mamm deom ni. Setu penaoz en em ziskouez ar Werhez, dirag daoulagad on ene, kaer evel mamm !

E komansamant ar bed, a lavare, n'eus ket pell, eur skrivagner brudet braz euz Bro-Hall, e komansamant ar bed, Doue ne helle ket diskregi diouz e labour, a-raog beza krouet kalon eur vamm, da lared eo, a-raog beza greet ar gwella tra a gaver war an douar.

Hag evid gwir, va breudeur, petra gwelloc'h eged kalon eur vamm ? Klaskit, e-touez ar vertuzioù, dibabit, evid komz hervez ar Skritur Sakr, e liorz an ene, ar frouez ar c'hweka, ar frouez ar saourusa, evid skouer : ar garantez, an deneridigez, an nerz kalon. E peleh e kavom kement-se, ma n'eo ket e kalon ar vamm ? Ar vamm ? Evid piou e vev, nemed evid he bugale ? Evid piou en em skuiz, evid piou e poagn, hag evid petra, ma n'eo ket evid he familh, evid he maga, evid he dizamma ? It en eun tiegez kristen : klaskit ar vamm ; e peleh he havit ? An tosta ouz kavel he bugel evid e luskella ; an tosta ouz e vele, pa vez klañv, evid e frealzi, e zizoania ; an tosta hoaz, siwaz ! pa vez war ar var-skaon, evid skuilha warnañ, gand he daelou c'hwero, eur bedenn diweza !

Ar vamm ? Med tenna a rafe, n'eo ket gwir ? an diweza tamm bara diwar he muzelloù evid e rei d'he hrouadur en dienez ! En em ziwada a rafe, ma ouife dre ze savetei buhez he bugelig karet ! Poaniou, trubuilhou, skuizder, enkreze, setu doare ar vamm war an tamm douar-mañ ! setu ho kalon, tadou ha mammou !

Ma ! Bremañ, grit ar pezh e-neus greet ar Hrouer e-unan. Kemerit ar galon-ze, lakit enni karantez, med eur garantez dispar ; lakit enni dauster, madelez, teneridigez, med beteg he leunia, hag he leunia beteg muzul barr, hag ho-pezo eur skeudenn euz kalon ar Werhez.

Sellit ouz Mari penn da benn he buhez ; lennit en Aviel doare kalon ar Vamm venniget-se : pebez karantez evid he mab Jezuz ! Setu hi e Betleem : klask a ra digemer en eun ostaleuri : ne vezo ket digoret dezi ; hag e ranko astenn he hrouadur nevez ganet war eun dornadig plouz, eun dornadig kolo, e-touez al loened.

Eun nebeud dervezioù goude ze, ar Roue Herodez a glask ar Mabig Jezuz evid e laza gand an Inosanted. Red eo tehoud ! ha Mari d'an Ejipt. Pell eo ar vro ; tenn eo an hent ; paour truezuz ar Familh Zantel. N'eus forz ! He mab eo a zo ar gwalleur war e benn !

Tremenet an arne. Emañt bremañ e Nazaret. O ! va breudeur, na pegen dudiuz gweled ar vamm o tougen war he breh ar Mabig Jezuz, o teski dezañ pedi, meuli Doue e Dad a zo en Neñv ; a seha ive e zaelou : rag Jezuz, evitañ beza Doue, Jezuz a zo bugel, Jezuz a zo den evel dom.

Med an den santel Simeon, d'ar mare ma 'z eas Mari d'an Templ d'en em burifia, e-neus lavaret dezi : « Ho kalon, maouez, a vezo treuz-zet gand eur hleze a hahar. » Hag e kavom Mari war lein Menez Kalvar, he halon rannet o welad Jezuz, goapet, skourjezet, kondanet d'ar maro, e benn sakr kurunet gand spenn, e gorr diframmet a beb seurt gand e vourevien, ha staget war ar Groaz, evel eun torfedour ! Setu doare kalon Mamm Jezuz.

Doare kalon or Mamm deom ni : war ar Halvar ez om deuet da veza « gwir vugale ar Werhez ». Hent ar Groaz, hag a oa ken tenn evid Jezuz sevel ar grehenn anezañ, Mari, penn da benn, e heulias gand he Mab. On hent deom ni ive, va breudeur, daoust ha n'eo ket ive, ha rust, ha tenn, ha stard e zavel ? Eo ! Ha koulskoude red eo kenderhel kaloneg. Penaoz pignad heb fallgaloni ? Penaoz ? Evel Mari ! ha gand Mari ! Hi a hencho peb hini ahanom war-zu an Neñv.

P. Batany.

Alvokad an Alvokaded

Setu amañ eur gontadenm dastumet e bro ar Perou gand ar skrivagner brudet Ricarda Palma, an hini e-neus greet du-ze eul labour heñvel ouz hini Fanch an Uhel en on touesk er hantved diweza.

War am eus klevet ne blij ket na kalz na nebeud an alvokaded d'an Aotrou Doue. Eur wech ma tégouez unan bennag e-tal dor ar Baradoz e vez kavet n'ema ket en urz vad e basport ha n'eus ket tu da rei plas dezañ...

Eun deiz bennag, beure mad (mintin mad), e oe stoket ouz dor an Aotrou Sant Per. Hemañ, morgousket, a reas eul lamm euz e wele. O lakaad e benn en dorigell, e welas eun denig koz, eur haz war e lerh.

« C'hwil a zo abred avad, va den mad, a hrozmolas an abostol, eun tammig droug ennañ, petra 'zo ? »

- Mond ebarz, na petra 'ta, a respontas an hini a oa er-mêz.
- Ha piou oh, paotr faro ?
- Ibo, sitoyan roman, hag ho mevel.
- Mad neuze... diskouezit ho paperiou. »

An hini koz a roas e basport da zantig an alhweziou. Hemañ a zerras an dorigell hag a yeas kuit.

Mond a reas Sant Per d'ar bureo e lèh e veze sellet ouz ar paperiou. Re an hini koz a oe kavet mad, hag aotre a voe roet d'e lezel dond ebarz.

« Deuit tre », eme Zant Pèr.

An denig koz a antreas, hag e teuas war e lerh e gaz, ken didrouz ha tra.

Eun tammig yén e oa an amzer, hag an hini nevez-dégouezet, goude rei eun taol broust d'e zilhag ha kas kuit poultrenn an hent, a azezas e-tal an tan, e loenig gantañ ouz e dreid, d'en em domma. Sant Pèr, hag a vez eun den mad ha karantezus peurliesha (nemed eur wech an amzer, pa ya droug ennañ, ha neuze ez eo den da droha diskouarn an dud !) Sant Pèr eta a ginnigas dezañ eun tasig « mate » greet gant geotenn ar Paraguay, rag, e barr an neñv n'eus ket na te na kafe, na pa vefe evit pemp gwennege.

Goude beza en em dommet eun tammig, e houlennas an denig koz ouz ar Zant braz :

« Ha penaoz ema an traou ganeoh amañ e-tal an nor ? »

— Etré daou, a respontas Sant Per, dousig ; evel peb den e karg, e welan amañ peb seurt traou, re vad ha re 'fall.

— Ma n'oh ket kontant ha ma fell deoh kaout eur garg uhelloc'h n'ho peus nemed lavared din fraez ha splann. C'hwil a zo bet mad em heñver ! Me a zo prest da renta servich deoh ive.

— Bennoz Doue deoh. Me a zo kontant braz. An oll dud a zo leun a zoujañs evidon. Ne jeñchfen ket va 'flas gand hini eur prezidant republik.

— Mad ! mad ! N'em eus ket lavaret netra ! Met c'hwil a zo sur ne vo ket laeret ho plas diganeoh ? C'hwil ho peus paperiou o tiskouez ez oh bet anvet porzier an neñv hag ho peus pèet ar gwiriou dléet ?

Sant Pèr a skrabas e benn moal. Biskoaz n'e-noa soñjet ne 'oa ket bet roet dezañ paperiou timpleret o testenias e oa mestr an ti, karget da vikén da zigeri ha da zerri dor ar Baradoz.

« Neuze 'vad, mignon paour, riskl a zo na vefe laeret ho plas diganeoh eun deiz bennag. Eürusamant emañ amañ. Roit din eun tamm paper timpleret, eur bluenn ha liou-du, hag e savin bremañ deoh eur goulenn ofisiel evit eun diplom, eur seurd santifikad... Merka a rin, ouspenn, ped bloavez ho peus tremenet én ho harg, hag evelse e vo ésoh deoh goulenn eun tammig pañsion pa vloh erru skuiz gant ho labour-porzier.

...Pemp munud diwezatah e lakaas Sant Pèr e houlenn etre daouarn an Oll-Halloudeg.

« Petra eo an dra-ze, Sant Pèr ? Paper timpleret a zo ganeoh ! Peseurt diplom ha santifikad a fell deoh ? Gand va gér (gand va homz) ho-peus awalh, emichans, ha re, zokén ! »

Ha, goude beza torret an tamm paper, e lavaras an Aotrou Doue, en eur vouse'hoarzin :

« Sur awalh c'hwil a zo bet eun tammig dievez ha lezireg en ho karg e-tal an nor, hag ez eus dija eun alvokad bennag ér ger ! Bremañ avad e vo brao an traou ganeom e rouantelez an neñv !... »

...Hag abaoe an deiz-se o deus alvokaded an douar unan eus o micher er Baradoz, da lavared eo eur Zant Patron, ar Sant Ibo-ze hag a vez skeudennet en ilizou, eur haz ouz e dreid, evel evid diskouez deom e vez bepred krañnet (krabiset) eun tammig ar re a ya dirag ar varnerien...

Tud Rom avad, pa glevjont e oa dégoezet eun alvokad e-barz palez an neñv, a oe souezet braz hag e savas droug enno. Ha setu perag, an deiz ma oe disklêriet santelez Sant Ibo, e oe savet du-ze an tammig son flemmuz-mañ :

« Advocatus et non latro,
Res miranda populo ! »



Brud fall a zo bet a-viskoaz gant an dud a lezenn. Kalz ahanom o deus désket er skolaj ar son savet gwechall diwar-benn Sant Erwan :

« Sanctus Yvo erat Brito,
Advocatus et non latro,
Res miranda populo. »

(Sant Erwan a oa Breizad, alvokad heb beza laer, an dud n'int ket evid kredi !)

N. B. — « Ibo » (distaget tost da vad evel « Ivo ») a zo ivez eur ger latin hag a dalv « Mond a rin ».



eun al mad da ob al lonker

War a glevan, eun eskob Saoz e-neus lakét staga, en ilizou e eskobti, ar baperenn-mañ, evid ar vezverien.

1o) Peogwir e kavez mad ar gwin, digor eun ostaleri, en da di, evidout da-unan hepken.

2o) Ro arhant d'ar wreg da brena al litrad kenta.

3o) Ev er gér, ha pae d'ar wreg ar pezh a baefez en ostaleri.

4o) Pa vezo rinset eur voutailh, ro arhant d'ar wreg da brena eun all. Evelse da ostaleri ne vezo morse dibourve ha da wreg, gand ar hounidegez, a hellô zoken ober he marhad.

5o) Na petra 'ta, da gont a zo sklêr : mervel a ri dizale gand ar hlenved avu.

6o) Mervel dineh a helli avad, rag da wreg he-devezo espernet trawalh evid sevel he bugale.

7o) Na pa vezo da rélegou er vered, e hellô eil-dimezi... hag en taol-mañ d'eun den a skiant !

[Dhuar Kannadig Landi.]

Eur Breizad er Stadou-Unanet kant bloaz 'zo :

HENRY de COURCY

(1820-1861)

Dre-oll ebarz ar bed ez eus Bretoned, evel ma oar peb-hini. Piou a zavo eun deiz roll an unvaniezoù krouet gant on henvroiz e peb leh ? Ped strollad a zo bremañ e Pariz hepken ? Ped a zo bet abaoe 150 bloaz ? Diêz eo lakaad daou Vreizad da labourad a-gevred e Breiz ; peb hini a ya diouz e du, hervez e youl hag e faltazi. Er miz euz ar vro, daou Vreizad n'int ket evid tremen heb sevel eur genvreuriezh bennag. Ni a zo tud fentuz avad !

En dra-ze edon o soñjal an deizioù-mañ en eur lenn eul leor galleg digouezet din euz an tu-all d'ar mor braz. E Québec (Presses Universitaires « Laval »), eo bet embannet al leor-ze, daou vloaz 'zo. Ar skrivagnour, Robert Sylvain, a zo eur Hanadian e-unan. E labour e-neus talvezet dezañ beza anvet doktor gant Skol-Veur ar Sorbonne e Pariz. Danvez al leor a zo buhez hag oberennou eur Breizad, Henry de Courcy. Hemañ an hini eo e-neus savet evid ar wech ken a eun istor euz an Iliz Katolik er Stadou-Unanet. Setu amañ eun dra « etrevroadel » ma 'z eus unan !

Henry de Courcy a oa ganet e Brest d'an 11 a viz Gwengolo 1820. E dad-koz a oa bet dimezet gant eun dimezell De Coetnempren de Kersaint, c'hoar ar vis-admiral De Kersaint, bet kannad e Pariz epad an Dispah Braz. Hennez a oa bet eun tammig tomm ouz an « idées nouvelles », ar pezh na viras ket outañ da veza dibennet e miz Kerzu 1793...

Henry a dremenas e vugaleach e Kastell-Paol, ha d'e zeiteg bloaz, echu e studi e skolach ar gêr-ze, ez eas da Bariz da gaoud e zaou vreur, Pol hag Alfred (deuet da veza brudet o daou diwezatah dre o leoriou diwar-benn Breiz) hag a oa o chom neuze e ru Notre-Dame-des-Victoires. Kambrig an tri den yaouank a zeuas da veza « une nouvelle Bretonnerie de Paris » evel ma lavar Robert Sylvain (eun neiziad nevez a Vretoned e Pariz). Eno e teue aliez Brizeug, Audren de Kerdrel, Aurélien de Courson, Emil Souestr, Gabriel de La Landelle, Arthur de La Borderie, Louis de Carné, an Ao. beleg de Lezeleuc, Kermarker, Ar Gonideg, h. a. Komzet e veze diwar-benn traou Breiz, savet e veze leoriou war ar vro goz, studiet e veze ar brezoneg. Ar re o deus lennet leor brao an Doktor Dujardin war Ar Gonideg (embannet e Brest e 1949) a anavez eun tammig istor ar « bretonnerie »-se. Plijuz eo memez tra lenn ar pennad nevez savet gant eun den hag a zo veva ken pell all diouz Breiz ha diouz Pariz ; ar pezh na vir ket e vefe mad displega an istor-ze dre ar munud e brezoneg evid dudi ar Vretoned a-vremañ... Ha n'eo ket eun dudi hag eur blijadur hepken e vefe, meur a gentel a helife beza tennet euz ar pezh a oe graet (hag huñvreet) eno, ouspenn kant vloaz 'zo. Evel ma lavare eun deiz ar skrivagnour saoz Chester-ton, « istor ar bed a zo is'or meur a labour boulhet... ha lezet hanter-hreet ». Istor Breiz a zo ivez. Tro a vefe da gaoud e-kreiz dismantrou an traou savet gwechall ha kouezet en o 'foull eur men bennag hag a vefe mad hoaz d'ober savaduriou nevez, sur awalh.

Alfred de Courcy a oa o labourad er « Compagnie des Assurances Générales », « eur gwir oaled breton dre an hini a savas ar Gompagnunez-se, Auguste de Gourcuff, dre ar re a oa oh ober war he zro er hargou uhela ha dre an darn vuia euz he implijidi » (Dujardin). Ar Gonideg a gave eno eun toullad brezo-negerien euz pep korn Breiz-Izel hag a roe tro dezañ da vond donnoh er studi war ar yez hag ar rann-yezou (evel-se e-noa graet ivez Laenneg gant tud klañv e ospital, hag evel-se e ra bremañ hoaz an Doktor Tricoire gant re Gastelbriant). Pol de Courcy a oa implijet e « Compagnie des Glaces de Saint-Gobin », med e kave muioc'h plijadur o studia an istor hag an traou koz, hag e lezas e blas gant e vreur Henry. Daoust da hemañ beza yaouankig hoaz (ne

oa nemed 17 bloaz !), e teuas huan da veza unan euz pennaù braz ar gompagnunez. A-benn eur bloavezh bennag, e oe kaset da Vro-Saoz ha da Iwerzon, hag e 1844 e oe anvet rener e New-York e leh an Ao. Gay-Lussac (mab ar chimist brudet). Araok mond kuit, Henry a zimezas gant Marie de Gourcuff, merh Auguste de Gourcuff.

Ne oa Henry de Courcy nemed 24 bloaz pa erruas er Stadou-Unanet ; e yehed a oa fall ouspenn ha kalz a labour a oa evid lakaad e gonters da vond endro. A-hend-all, evel e zaou vreur, studi an istor a blije dezañ muioc'h eged « gwerza looking-glasses ». En eul leorig savet diwar e benn gant e vreur Alfred e 1861 e lennom : « Bep gwech ma kave Henry eun tammig amzer goude e zervez labour evid e vicher, en em lakee da studia yez, doareou, istor ha lezennou ar Stadou-Unanet. Ne oa ket evid chom gwech ebet heb labourad. Pellig awalh edo e di eus kartar ar henwerz. Bepred e veze eul leor gantañ o vond hag o tond gant e hent ». Henry e-unan a skrive d'eur mignon er Hanada e 1855 : « Me a garfe mond endro d'ar vro goz en abeg d'am yehed fall. N'ouzon ket petra a hellin ober en amzer-da-zond ; n'ouzon ket hag e fello d'an Aotrou Doue va lezel eur bloavezh bennag hoaz war an douar. Kalz em-eus labouret, ha re marteze. Pegwir e oan rener ar gompagnunez er vro-mañ, e vije bet gwelloc'h din chom heb ober traou all. Med va brasa plijadur a oa labourad bennoz war draou dudiusoc'h ha tostoc'h d'al labour-penn. »

Koulskoude, araog mond kuit euz ar Beh-Nevez, ez eas da dremen eur miz bennag er Florid, en eur gêrig anvet Sant Augustin. « Aman ez eus tierigou savet gant mein braz, mogerioù mein endro d'al liorzou. Seblantoud a ra din beza e Kas ell-Paol... »

E miz Mae 1856 e kuitae New-York, heb beza gwellaet e yehed. Pemp bloaz diweza e vuhez a dremenas e broioù ar Hreisteiz, Roma, Cannes, Er gêr-ze e varvas e 1861.

Epad an amzer hir awalh (unneg bloavezh) ma oa chomet Henry de Courcy er Stadou-Unanet, e-noa studiet dreist-oll istor ar Gatoliked er vro-ze. Kalz pennadoù-skrid a oa bet kaset gantañ da gazetennou gall (L'Univers, L'Ami de la Religion) ha kanadian (Le Monde, Montréal). Danvez e-leiz a gavas evid e skridoù e ti e vignon John Hughes, arheskob New-York. Eno e oa chomet pape-riou ha traou an Ao. Bruté de Rémur, eur Breizad all, ganet e Roazon e 1779, e ti Breujou Breiz (Parlamant koz, bremañ « Palais de Justice »). En ti-ze edo Tribunal ar Revolution, hag ar paotr bihan e-noa gwelet (ha graet) kalz traou pouezuz epad amzer an « Terreur ». Pell amzer goude, e skrivas e-unan kalet-rou a-bez diwar-benn an Dispah e bro Roazon. Embannet e oe e notennou e saozneg e 1861 gant e vignon James Roosevelt Bailey, eskob Newark (euz tie-gez ar plah santel Elisabeth Seton... hag an daou Breizidant Roosevelt...) dindan a ano-mañ : « Memoirs of the Right Reverend Simon William Gabriel Bruté, first bishop of Vincennes, Indiana ». Lod euz ar « memoirs »-se a oe troet e galleg gant Henry de Courcy hag embannet ivez e 1860-61 ebarz ar « Revue de Bretagne et de Vendée », eur gelaouenn savet en Naoned gant La Borderie. Med an eskob Bruté, « den gouizieka ar Stadou-Unanet » (hag a oa deuet a benn da gas ouspenn 5.000 leor gantañ a-dreuz koajou braz an Indiana, leun evid hoaz a « Bennou-Ruz » en amzer-ze) a felle dezañ ivez sevel leoriou diwar-benn istor an Iliz er Stadou-Unanet. Broudet e oa bet d'al labour-ze gant an daou vreur Jean-Marie ha Felicité de Lamennais, bet anavezet gantañ pa oa kelenner e klerdi braz Roazon gwechall. Koulskoude, dastum danvez evid e oberenn vraz ne reas ken, en abeg d'al labour e-noa da ober en eun eskopti nevez deg gwech brasoc'h eged Breiz a-bez. Goude e varo, e 1839, e oe lakaet en e blas e penn an eskopti-ze eur Breizad all, an Ao. Guynemer de La Hailan-dièr, ginidig eus Kombour (ha eontr koz an nijour brudet Guynemer). An eskob nevez-se an hini eo a gasas da New-York paperioù koz an Ao. Bruté. Henry de Courcy a gavas eno eta danvez founnuz evid e bennadoù-istor skrivet evid ar helaouennou galleg. Al leor savet gantañ diouz ar pennadoù-ze a oe troet e

saozneg gand eun Amerikan yaouank, John Gilmary Shea, deuet euz twerzhon er Stadou-Unanet evel kalz eus e genvroidi. An droidigez saozneg-se a oe moullet e 1856. Eul leor pouezuz ha dudiu e oa drezañ e-unan, ha dreist-oll dre ma roas kalon da J. Gilmary Shea da genderhel gand e labour en ero boulhet gand Henry de Courcy. (Gantañ e oe embannet diwezatoh eul leor kalz hirroh ha pouezusoh dindan an ano « The Catholic Church in the United States », New-York, 1886-92, 4 vol.)

N'eo ket hebken daou eskob breizad a oa neuze er Stadou-Unanet. Eur gwir « bretonnerie », ne lavaran ket. Ouspenn eskibien all evel an Ao. David hag an Ao. de Goesbriand, eur bern misionerien, beleien ha seurezed a oa ivez eno. Red e vo eun deiz bennag displega istor an neiziad Bretoned-se. Unan anezo, anvet du-ze « Father de Clorivière » a dalv beza meneget amañ. E wir ano a oa Joseph Pierre Picot de Limoëlan. Studiet e-noa e Roazon asamblez gand Chateaubriand; epad an Dispah braz e « chouanteas » gand Jorj Kadoudal; goude-ze e lakeas eur « machine infernale » da darza e ruiou Pariz evid laza Napoleon!... Red e oe dezañ neuze mond kuit euz Bro-Hall, na petra 'ta, hag erfin e teuas da veza beleg e Charleston. Sainte-Beuve e-noa lakaet anezañ en e romant « Volupté ». Henry de Courcy a zavas eur pennad diwar-benn e genvroad evid ar gelaouenn « Revue de Bretagne et de Vendée ». Ar pennad kenta euz eur « galerie de Bretons devenus célèbres à l'étranger » e tlee beza ar pennad-se. Sioutaz! ne oe nemed, eur wech muioh, « eul labour boulhet ha lezet henter-hreet »... Dond a reas a benn koulskoude, araog mervel da zastum al lizeriou kaset d'an Ao. Bruté gand an daou vreur de Lamennais. Al lizeriou-ze a oe moullet en Naoned e 1862 gand Eugène de la Gournerie.

Eun druez hag eur rann-galon eo soñjal petra e-nije graet eun den kaloneg na speredeg evel Henry de Courcy, gand eur yehed gwelloc'h hag eur vuhez hirroh... ha nebeutoh melezhourioh da werza! Kentoh eged gouela, koulskoude, war ar pez n'eo ket bet, gwelloc'h eo tenna eur gentel diouz buhez « berr ha touchant » an den yaouank-se. En desped da beb tra, buhez berr, yelied fall, labour didruez e vicher, e kavas tro da labourad evid enor Breiz ha gloar an Iliz:

« An neb a venn, hennet a hall »...

Bennoz Doue d'ar Hanadian-se, Robert Sylvain, hag e-neus savet eul leor ken brao ha ken hirvidig en enor da Henry de Courcy. Ha salv ma teuo unan bennag ahanom da zastum bruzunou an oberenn ne oe ket or henvroad yaouank evid kas da benn. Eun deskaouenn vras a zo da ober; e-kreiz parkeier ar Bed-Nevez e vo kavet bleunioh Breiz e-leiz, skrivet warno ano meur a Vreizad « deuet da veza brudet er broioh pell »...

B. a Germorvan.



AR GASONI

Ar gasoni a blij dezi labourad dre zindan, evel ar hoz.

Gwaz a ze d'an neb a vag kasoni en e galon. Eur zervichêrêz fall eo hag eur vestrez falloh hoaz. He magadurez eo ar gevier kentoh eged ar wirionez. Yud ha kriz eo, n'eo ket buan da ziskregi ha stlejet e vezer d'he heul pelloc'h eged na garfed; beteg an deiz ma vezer spontet o weled frouez ar gasoni o tarevi. Ma hellfed hoaz en em denna neuze euz krog he faoiou louz!

War ar gasoni, war ar gevier... netra vad na paduz ne zav. War ar garantez ha war ar wirionez ne lavaran ket!

Eur wall droidad pesketerezh

(kendalh)

gand Job SEITE

War ar roh.

Deom ni eo bremañ, d'on tro soñjal en em zivenn. Ar mor a zav atao; en e hourlenn e vezo war-dro 7 eur. Ar roh m'emaom warni he-deus war-dro tri metr a ledander war seiz pe eiz metr a hirder. Euz a rez an dour beteg kein or roh ez eus war-dro pevar metr, med ar mor a zavo c'hoaz hag e-pad eun eur d'an nebeuta an tarziou mor oh en em daoler ouz or roh a strinko ouzom eonenn gwenn. Koueza ' reont warnom euz a beb tu, a-zehou, a-gleiz, dirazom, a-dreñv or hein, pa zonzom an nebeuta. Evel eur foet e pisont ahanom, kement a err a zo enno. Beh taol eo treuzet on dilhad. Pebez taolenn spontuz dirag on daoulagad! An tarziou, evel feulzet, a zired, a zired, a en em daol a flagach ouz or roh gand eun trouz spontuz, a zav outi evid he lipad, hag a en em bleg warno o-unan evid koueza ha freuga e eonenn gwenn o virvi evel an dour bero. Tremenet unan, e teu eun all d'an daoulamm da en em daoler ouz or roh, evel m'o-dije c'hoant or samma ganto.

Eun eur a dremenom o stourm ouz an tarziou, erfin, koulskoude, e teuont da goll o nerz ha da rouesaad: trehi a ra ar mor. Emaom saveteet! med yen eo! on dilhad a zo gleb dour teil, hag an avel a hwez atao gand kounnar, n'oneus goudorenn ebet ha krena ' reom evel an deliou. Netra da zebri, med an dra-ze ne jal ket ahanom, n'oneus tamm naon ebet. Or soñj a nij war-zu on tri genvreur. An avel foll a groz atao, beteg an deiz war-lerh da greisteiz e talho evel-se. Penaoz e hellfent dalher penn? beuzet int sur a-walh, biken n'o gwelim! Ar soñj-se a jomo da zebri or spered e-pad an noz hag a-hed an deiz war-lerh. Ne deom ket a-benn d'e gas diwar or spered ha poan a ra deom. Evelato eh en em zantom euruz da veza daou: en em gennerzi a hellom an eil egile: « Dalhmad mad beteg ar fin, a lavaran d'an Ao. Salou, bezom dineh bremañ, arabad eo deom kaoud aon ken, warhoaz d'an izelvor e teom a-benn da dehouz euz alenn gand on nerz on-unan. »

Med da hedall, e oa red deom delher penn ouz ar yenienn hag a-hed an noz e oe da deom en em zifreta heb ehan, hejal on divreh, on divesker. Pa vezem skuiz e chomem a-zav evid staga adarre en-dro goude ze. E-giz-se on-eus gellet mired ouz ar yenienn da hounid on izili.

Klask a zo deom.

E-pad eur pennad e teuas deom ar soñj da guitaad on enezenn e-pad an noz, rag d'an izelvor, etre hanternoz hag euz eur, ez eus e-kreiz ar gouzoug-vor eur riboull ha n'e-neus nemet daou-ugent pe hanter-kant santimetr a zounder. Red eo deom evelato, a-raog en em riskla, gouzoud an eur just, med or montrehou, glebiet en or godelloh karget a zour, a zo chomet a-zav. Surroh e kavom gorzot an deiz.

War-dro kreiz an noz, e welom nepell diouzom sklêrijenn, euz tu Kerlouan, hag ar gouleier a zeu hag a ya. On tud e oa, deuet ouz or hlask, rag ar baotred saout o-doa lavaret: « Tri anezo a zo eet er vag war-zu ar mor braz, med daou a zo chomet war reier an enezenn. » Unan euz va breudeur, gand e letern, a dreuzas ar gouzoug-vor, pa oe izel ar mare hag a deuas harp ouz ar roh m'edom. Youhal a reas a bouez penn meur a dro, med trouz an avel hag ar mor a holoas e vouez, ha ne glevjom seurt. En-dro ez eas, enkrezet...

Roh ar brini-mor.

Pa deuas ar mor da veza izel, e tilezom or roh genta evid eun all, kalz uhelloc'h, goudorroh, c'hweh kant metr euz an hini genta, hag a zav uhel spontuz en tu pella war-zu ar huz-heol. Aze e vezom dienkrez. Dond a reom a-benn ez a-walh da zevel warni, rag an noz, daoust ma n'eus ket a loar, n'eo ket re deñval, ha tour-tan Enez-Verh a daol warnom ixe beb an amzer e vannou sklêrijenn. Evelato, a-raog dond a-benn da en em loja warni, eo red deom diloja diouti eur vandenn brini-mor a gousk eno dibreder, daoust d'an tornaot. A ren-

kennou emaint eno, serret an eil ouz eben. Red eo deom o hejal evid ober dezo nijal kuit. An dra-ze avad ne ra tamm dezo hag e-pad hir amzer e nijont en-dro deom en avel, droug enno, a-raog mond da gluda war eur roh all.

Setu ni bremañ kludet uhel ha goudoret en heveleb amzer ouz an avel ; ma vije bet seh on dilhad, or-bije gellet kousked eno e peoh. Med treuzet eo deom ha red eo deom kendelher d'en em zifreta evid herzel ouz ar riou.

Ar 4 a viz Eost.

An noz ne zeblantas ket deom beza re hir. Da viz Eost, an deiz a deu c'hoaz buan a-walh, hag a-veh m'eo 4 eur ma stag an deñvalijenn da deuzi e tu ar sav-heol : a-nebeudou an oabl a deu da lugerni. Eur pennad c'hoaz ha setu an heol o tispaka, ne oe ket en dervez-se kaer ar sav-heol : an avel a fuc'h atao, kreñv evel en deiz a-raog hag ar mor n'eus ano ebed gantañ da zioulaad. Netra en dremmwel, bag ebed, na braz na bihan. Dirazom ar gwagennou a dremen hag e-kichen ar reier ar mor a zo gwenn kann gand an eonenn o strinka a beb tu.

Dirazom, war beg douar Kerlouan, tud a zell war-zu or roh gand lunedeier da weled a-bell. En em ziskouez a reom, difreta on divreh. Siwaz ! n'om nemed daou, war pemp oam lohet !

Da 7 eur diouz ar mintin, ar mor a zo c'hoaz en e hourlenn ; dineh koulskoude e hellem beza e-leh m'edom savet : unan pe zaou darz-mor a hellas hebken on tizoud. Pa welom ar roh m'edom warni en deiz a-raog, ez om spontef, rag seblantoud a ra deom emañ a-veh uhellog eged ar mor braz hag ouspenn eun eur e oe gwalhet gand an eonenn a zav diwar an tarziou.

War-dro 10 eur, ar mor a ya kalz war a-dreñv : etré an enezenn hag an douar, an tarziou a zired gand nebeutoh a err. Gweled a reom emeur oh en em bourchas evid dond d'or herhad. En eur ober sin dezo, e klaskom rei dezo da anaoud eo re abred c'hoaz, e hellom gedal ma vo izel ar mor. Netra da ober, or signaliou n'int ket komprenet, pe gentoh, ne fell ket ganto on lezel pelloh war on enezenn. Eiz den, eiz roefiver ampart, a zav en eur vag, a deu war-zu ennom, hag, heb re a chati, on digas war an douar-braz.

Amañ, pa zigouezom, e kavom or herent, daelou leiz o daoulagad hag eur bern tud all euz Kerlouan ha Gwiseni. Euz or gwella e reom evid frealzi tud ar re a vank. D'an dud bodet en-dro deom e kontom ar pez a oe erruet, he-doa o bag gellet tehoud euz ar reier, or-boa o heuliet e-pad diou eur. « Peogwir o-doa dalhet penn ken pell ze, a lavarom ni, perag n'o-dije ket greet e-pad an noz a-bez ? Peb esperañs n'oa ket kollet. E helljent beza dastumet gand unan euz ar batimanchou a dremen ken aliez er horn mor-ze. » Setu ar pez a hell-jom lavared hebken, ha red eo anzav, e lavarem an dra-ze heb kredi re on-unan, rag penaoz kaoud esperans he-dije gellet eur vagig ken skañv stourm e-pad eun nozvez ouz eur gorventenn ker foll ?

Evelato, an dud or selaou, a jom diskredig hag a-dreñv or hein eur peske-taer a ziskler kreñv a-walh : « A-raog an noz deh, an tri-ze a oa e strad ar mor, ha den n'o gwelo biskoaz ; meur a besketaer euz Kerlouan a zo en em gollet evel-se, ha biskoaz den ebed goude-ze n'e-neus klevet ano anezo. » Ar pez a zisklerie hemañ a vouez uhel, ar re all henn ree a vouez izel.

Eun tammig a-raog kreiteiz, e zigouezom e presbital Gwiseni. Amañ ive an dud a zo glaharet, e-leiz a zaelou. Doaniuz oa evidom ! med petra lavared dezo evid o frealzi ? Kenvreudeur euz ar parrezioù tro-war-dro a zo diredet evid goulenn kelou. Konta a reom dezo an darvoud, kuit ez eont diouzom, doaniet ha glaharet evel m'emaom on-unan.

Pebez devez ankeniuz ! an abardaez a zigouez... Netra... kelou ebed... echu eo ganto ! Kollet int moarvad, esperans ebed ken !

Da gousked ez an war-dro 8 eur, ya horv brevet gand ar skuizder ha dreist-oll gand ar rann-galon. Dond a ran a-benn da gousked, med da beb mare e tihunan en eul lamm. Huñvreou skrijuz a deu din : e-kreiz va housk e welan anezo o zri, ruilhet ha diruilhet e-kreiz an tarziou, oh en em zifreta er mor, hag an eil goude egile sachet en o zav sonn war-zu strad ar mor braz.

(Da genderhel.)

Job Seite.

TOUGN, AR HI KOZ

Bemdez d'ar mare-ze, Jakez, mestr ar Veuleuri, a veze en e graou-kezeg, ha Soaz, e wreg, en he hraou-saout. Tomm oa bet an amzer. Al loened, goude beza karget o hov war ar peuri, a oa bet degaset d'ar gêr. Chanig, ar verh, a yee hag a deue, prez warni, euz an tiforn beteg kraou al leueou ha krevier ar moh, gand sailhadou gwelienn. Ne ket labour a vanke er Veuleuri !

Epad an amzer-ze, Toug, ar hi koz, a oa astennet war e gov, dirag e log, e fri etre e baoiou araog ; n'oa nemed e zaoulagad o fiñval en e benn. En eun taol, Toug a zavas e benn en eur zelled warzu ar porrastell. Diou harzadenn, ha Toug en e zav, sonn e zioukouarn hag e lost : eun den koz, gwisket deread, a voun an drav. Toug a jach war e jadenn en eur harzal gand e vouez hroz. An den koz a dosta outañ, goustadig, en eur ober sin dezañ gand e zorn. Toug a gompren ne glasker ket a zroug dezañ. Puchet bremañ war e benn-adreñv, Toug a zell a-gorn ouz an den koz en eur ober eun harzadenn beb an amzer.

Jakez a ziskouez e benn e dor ar hraou-kezeg. Souezet e chom o weled an den koz o floura e benn da Dougn ! Biskoaz eun den estren, o tond d'ar Veuleuri evid ar wech kenta, n'e-neus gellet ober kement-all ! Gwir, Toug a zo deuet da veza koz !

E 'forh war e skoaz, Jakez a deu beteg an den koz.

— Demad, aotrou ! eme Jakez.

— Demad deoh ! eme an den koz. Ar hi-mañ n'ema ket da werza ?

— Petra ? eme Jakez. C'hoant ho peus e ve gwerzet Toug deoh ?

— Ya. Ni a vije daou goz asamblez ha ni en em glevje mad.

— Med, aotrou kêz, eme Jakez en eur c'hoarzin, petra rafeh gand eur hi ken koz ?

— Entent outañ evid en em zizinoui.

— Med Toug n'ema ket da werza !

— Eur priz mad a roin deoh evitañ. Grit mad ho soñj. A-benn ar zizun a zeu me a deuo adarre da weled.

— Evel a geroh ! eme Jakez en eur skrabad e fri.

— Kenavo ar zizun a zeu ! eme an den koz.

— Ya. Kenavo...

Toug ne fiñvas na ne harzas o weled an den koz o vond kuit. Jakez a jomas eur pennad sebezet ; goude avad e tirollas da c'hoarzin !

D'an ampoent, Soaz a zifourch euz ar hraou-saout gand diou zailhad lêz goloet a eonenn.

— Piou zo bet aze, Jakez ? Kleved am eus Toug o harzal hag unan bennag o kaozeal ?

— Ya, Soaz : eur paour-kêz koz, sur awalh kollet gantañ e dammig spered, e-neus goulennet Toug da brena !

Ha Jakez, harpet war droad e forh a gendalh da c'hoarzin.

— Ha petra peus respontet dezañ ? a lavar Soaz.

— Netra, Soaz ! Ken souezet on bet, m'am eus dizoñjet respont dezañ !

— Jakez ! eme Soaz, ter, Toug n'ema ket da werza ! Toug a zo er Veuleuri abaoe pemzeg vloaz ha Toug a jomo er Veuleuri keid ha ma plijo gand Doue lezel anezañ e buhez !

— Arabad dit facha, Soaz ! eme Jakez. N'ema ket em soñj gwerza Toug !

Ha Soaz kuit, tiz warni, Chanig war he lerh, echu ganti gwelienna. Prestig goude edo an diennérez en dro.

Da gan ne oe meneg ebéd nag euz Toug nag euz an den koz.

Eiz devcz goude, d'ar memez eur, setu adarre an den koz er Veuleuri. Toug ne ra van ebéd ; lipad a ra zoken dorn an den koz deuet beteg e log, eur jadenn-gi en e zorn. Eur 'forhad melchon war e skoaz, Jakez a deu beteg-ennañ.

— Demad deoh ! eme Jakez.

— Demad ! a ra an den koz. Ha neuze ?
 — Va gwreg a lavar n'ema Toughn da werza !
 — Grit mad ho sonj, emezañ. Me baeo deoh ar priz a geroh !
 — Soaz ! eme Jakez en eur grial.
 — Petra zo ? eme eur vouez skilt ha lâr o tond euz ar hraou-saout.
 — An aotrou a zo deuet da gerhed ar hi !
 — Ar hi a zo mad el leh n'ema ! eme Zoaz; droug enni, en eur gendelher da horo ar Ruzig.
 — Ar priz a giri a roio dit !
 — Lavar d'an aotrou mond gand an diaoul ! Toughn a zo aze hag a jomo aze !

— Mad, eme an den koz, mond a ran d'ar gêr. Er zizun a zeu e teuin adarre.
 — Gweled a rit ne dalv ket ar boan deoh dond ! a respont Jakez ; nemed c'hoant ho pefe ober eur bourmenadenn.

An den koz a ya kuit goude beza greet flourig da Dough.
 Diouz ar pardaez, araog koan, e oa trouz er Veuleuri.
 — Te eo, eme Zoaz, dieheg, az peus lavaret d'an istrogell-ze dizrei amañ hirio ! Te peus c'hoant kas Toughn kuit !

— Ta,ta,ta, Soaz : ne ouezez ket petra lavarez !
 — Sur, e ouezan petra lavaran, ha Toughn a jomo aze ! Gouzoud a rez eo deuet d'ar Veuleuri da zeiz interrampañt or mab Jopig ?

— Ya, Soaz.
 — Mad, abalamour da-ze, Toughn ne vazo ket gwerzet !
 Soaz a oa prest da ouela.

— Med, Soaz, n'am eus morse soñjet gwerza Toughn ! Daoust ma ne rent servij ébéd deom koulz lavared ! Euz ar 'familh eo, ha biskoaz james n'am ho ar gouraj d'e laza ! pe d'e werza !...

Ar wech kenta oa da veza trouz etre Jakez ha Soaz abaoe o eured ! Hag ablamour da Dough, ar hi koz ! Biskoaz kement-all !

Jakez a zoñje oa echu an afer-ze. Med Soaz, a nebeudou, a deuas da gemered kasoni ouz ar hi koz. Evelato ne oe ano ebed euz Toughn, araog kreizteiz en devez ma tlie an den koz dizrei d'ar Veuleuri.

Pa deuas Jakez ouz taol, Soaz a oa teñval he fenn epad ma renke peb tra. Chanig ne lavare grik en eur ober wardro he hastolorennou.

— Petra zo nevez amañ ? a lavar Jakez, eun tammig enkrezet.

— Pa deuio an den koz bremañ, eme Soaz, ro ar hi dezañ evid netra !

Jakez a stagas da skrabad e fri. Eur zell a reas ouz Chanig. Houmañ, dre eun hoj-penn, a roas da gompren d'he zad oa gweloh rei peoh. Jakez a zebras e bred ar buhanna ma hellas, ha kuit ! An den koz a erruas d'an eur gustum. Jakez a roas ar hi dezañ. Toughn a yeas da heul e vestr nevez heb diskouez an disterra keuz.

Goude koan, p'oa eet Chanig d'he gwele, Soaz a lavaras d'he fried :

— Mad peus greet, Jakez ! Deuet oan da gaoud kasoni ouz ar hi koz !
 — Ne gomprenan ket ! eme Jakez, souezet-maro. Ha perag mar plij ?
 — Ablamour m'eo chomet beo an aneval-ze p'eo marvet Jopig !
 — Neuze out kontant bremañ ?
 — Ya, Jakez...

Soaz a zoublas he fenn da leñva ha Jakez a hojas e ziouskoaz meur a wech en eur skrabad e fri : pegen hedro eo ar merhed ! a zoñjas Jakez.

Eur pennad goude oa kousket an oll ha sioul ar Veuleuri.

E kreiz an noz, Soaz a oe dihunet : unan bennag a oa oh hoja ar porrastell ! Didrouz e teuas er-mêz euz he gwele ; sevel a reas eun tammig ridoch ar prenest ; ne welas netra, rak teñval oa an noz. Med klevet he doa eur hi o chilpad !...

Dioustu e tiskennas, sioul ; mond a reas gand tiz beteg ar porrastell : Toughn a oa eno, dizroet d'e gêr goz ! Soaz a zigoras buhan ha Toughn en em ruilhas etre treid e vestrez !

— Peoh, Toughn ! eme Soaz.

Soaz a grogas e kolier ar hi ha Toughn a deuas beteg e log' en eur lipad dorn e vestrez.

Soaz a stagas Toughn. Goude e flouras dezañ e benn hag araog dizrei d'he gwele e lakeas eur vriad plouz fresk el log.

Soaz ne lavaras ger da Jakez, atao kousket mord.

Pemp munut goude Soaz a oa kousket ive, eur mouse'hoarz war he muzel-lou

Yann Gorrigan.



KORN AR MEROUR

LENNERIEN GÉR,

Laouen oh bet, sur a-walh, o weled ar strivou on-eus greet abaoe eur pennad da wellaad ar gelaouenn, ha dreist-oll en diou neverenn diwza, miz Ebrel ha miz Mae : 24 pajenn e peb hini, gand skeudennou ha pennadoù plijuz war bep seurt danvez.

Pa skrivan ar pennad-mañ, n'em-eus ket resevet c'hoaz notenn ar mouler evid niverenn miz Mae. Evid niverenn miz Ebrel, avad, e houlenn diganeom ouspenn 56.000 lur, ha n'eo ket tout : ar hlichedou a zo ivez da baea, hag eun nebeud frejou bihan all.

Niverennou kaer'roh on-eus greet da ziskouez deoh e hellfem, gand muioh a arhant, ober gweloh, da rei c'hoant deoh kaoud eur gelaouenn plividikoh e-keñver ar pennadoù hag ar gwiskamant, da rei lañs deoh d'on skoazella.

Red eo deom bremañ, siwaz, distrei d'eur gelaouenn a 16 pajenn hebken. Klask a raim, evel just, lakaad er 16 pajenn-ze ar boued fetisa ha plijusa ma hellim, o klask atao skrivagnerien nevez d'or sikour, gand ar fiziañs ma hellim c'hoaz eur wech ar mare kas deoh eun niverenn a 24 pajenn, ha piou oar, beb miz zoken, hebdale.

Ma vefe kavet gand peb hini ahanoh eur houmananter nevez, euz niverennou a 32 bajenn e teufen da gomz deoh.

Petra a heilit ober eta d'or skoazella ?

1) Da genta klask koumananterien nevez en-dro deoh, e-touez ho mignoned en ho parrez, pe e-touez ho mignoned a zo et da jom er-mêz a Vreiz, hag a blijfe dezo lenn eur wech ar mare eun tamim brezoneg. Sonjit ervad e kement-se. Kredi a rit, e gwirionez e vefe diêz deoh kavoud eur houmananter nevez ? Grit eun taol-esa. N'eo ket eur houmananter a vo kavet ganeoh, med meur a hini.

2) D'an eil, da voaza ho mignoned da lenn Bleun-Brug, da rei dezo c'hoant da goumananti d'ar gelaouenn, ha n'hellfeh ket paea eur houmanant d'unan anezo ? N'hellit ket tout henn ober, evel just. Her gouzoud a ran mad. Evid kalz ahanoh ez eo diêz dija dioueri a 500 lur da reseo Bleun-Brug. Med ped all e hellfe, heb gouzañv re, neketa, paea eur houmanant d'eur mignon, d'eur misioner da skouer, o veva e kreiz an Afrik pe en Azl, hag a blijfe kement dezañ lenn eun dra bennag e yez e gавell.

3) D'an trede, gwerza niverennou Bleun-Brug en-dro deoh, ha soñjal a ran, dreist-oll er re, beleien pe liked, frered pe seurezed, a werz dija beb seurt kelaouennou galleg. Ma vefe kaset eur paotrig pe eur plahig d'ober tro ar vourh da werza Bleun-Brug ne gav ket deoh e teufe a-benn da skigna eun toulladig niverennou, dreist-oll ma vefe roet dezañ eun tamm gwerz butun war beb niverenn gwerzet ?

Skrivit deom hardis eta, d'an adres merket war ar golo : 21, rue Joseph-Doury, Nantes, da rei deom ho menoziou, hoh allou, da houlenn diganeom niverennou da skigna en dro deoh.

Gand fiziañs e hortozan ho skoazell. Rag, pa zoñjan ez eus en or skoliou muioh mui a vugale o teski lenn brezoneg, ez on sur e adkresko tamir ha tamir or helaouenn, e adkavim muioh mui a lennerien hag e hellim evel-se sevel deoh eur gelaouenn buhezekoh ha plijusoh.

Gab ar Moal,

Bioh Karling !

Karling ! Karling !

Ma vije beo Marianna e lavarfe din en eur gomz dre he fri hag en eur hwirikal evel eun nor ha n'eo ket bet eoliet abaoe marhad nao bloaz :

— Karling, peleh ema an dra-ze ?

M'em-bije klasket henn displega dezi. Amzer gollet !

— Larkoh eged Brest eo ? a houlennfe Marianna.

— Ya, Marianna.

— Mad ! a respontfe Marianna. Neuze eo pell !

Echu amzer al léz livriz ! Dre an heñchou, ni a yeas d'an harzou. An oll, an dud o-doa saout hag an dud n'o-doa ket a zaout, a oa mad en or heñver, e peb leh.

Med setu tiez goull e kreiz ar hoajou braz.

Amañ n'eus den ebed mui.

Ranket o-deus dilezel peb tra, o zi bihan ken koant, ti bihan o bugaleaj, an neizig o-doa savet ken tener ha ken laouen evid o bugaligou. D'ar red tan oa bet red nijal kuit.

Ha tud a zo bet digalon a-walh evid terri ar poltrejou, teñzorieu an eñvor ! Ya, o zerri o-deus greet, ma n'eo ket eur vez !

Klasket o-deus en armeliou an traou a dalvoudegez, o laeret o-deus ! Tud ganto dilhad soudard, galofichou zoken !

Hirio m'int beo c'hoaz ez eus traou kaer en o zi. Med o houstiañs a dle aliez kregi an tan enni !

Dilhad soudard a oa ganto, hag o halon ne dalveze ket zoken kalon eul laer ! Rag eul laer a rank a-wechou kaoud ijin ha beza dispont. I a zo eet da laerez e tiez goull, dindan ar wiskamant a holo an archerien hag ar re a zo karget da lakaad al laeron er prizon.

Peuh ! Doñjer am-eus outo ! Tud evel-se n'eo ket tud int, hag a dlefe beza torret dezo o fenn !

Kreier goull o oa ive. Ar halz euz an dud o-doa gellet kas ganto o chatal, med bez e oa ha n'o-doa ket bet a amzer d'o dastum. Gaviked a jome. Eno eo em-eus desket goro eur havrig. Me a gave din e veze goroet evel ar zaout ; padal e ranker mond dezi dre an a-dreñv, da vihan er vro-ze. Saout a jome ivez hiniennou. Paket e vezent ha lazet da wellaad kundu ar zoudarded.

Doaniuz oa gweled ar chatal dilezet-se. Ne ouient dare da beleh mond ha pa glevant an tennou e teuent e sod, o soñjal emichañs oa degouezet fin ar bed.

Ar pardaez a deue, eur pardaez goañv. Ar gwez a astenne en oabl koumoulet o divreh du. Tour Karling a oa beuzet er mogidell. Ni a oa eet da ziwall ur hoad.

Me a leze va huñvreou da nijal war-du va broig, war-du ar mor ahont e Sant-Pabu, war-du an tiegeziou gwaskedet, tan o lugerni en o hreiz... Bremaig dioustu goude koan e teufe tud da veilha, hag ar merhed dre ma hellent a vale kafe e-pad ma rede Jobig da di Mari Laot da brena kouignou, gwin ha sukr.

— He ! arabad dit ankounahaat eur voutailhad hini-kreñv ! a lavare dezañ e dad dre ar prenest !

Pardaeziou sioul va bro ! Pardaeziou lirin hag euruz ! Pardaeziou hag a gan e-pad m'o bever, ha pell hoaz da houde !

Nag eo brao tud va bro e-kichen an dud amañ ! An deñ a jom atao eur bugel, e gavell eo e di ! Den ne zilez e gavell a galon vad, ahan ma teu ar poent dezañ da vond kuit en eun arched... Euruz ar re a hell derhel o zi. Dizroet on abaoe ar brezel, ahont, harp en harzou, da Bontpier. Mad ! eno an dud, deg

vloaz goude ar brezel... o-deus bet adarre eur paper. « D'an disterra tamm trouz, a zo skrivet warnañ, e rankit dilezel ho ti ha kemeroud an hent. »

Paour kêz tudou ! O Breiziz, na c'hwil a zo brao ar stal ganeoh ! Med bezit mad e-keñver ar re n'o-deus mui na ti nag oz !

Noz teñval oa bremañ. Ni on-oa kavet, en eun ti e-kichen, golhejou ha pallennou, rag an avel a oa skornet. Hiniennou a varvailhe, re all a gouske, med re all a veilhe.

An noz a-raog on-oa tremenet e kreiz eur parkad rabez, gand eul lechefe a rener hag a oa prest d'ober en e lavreg dirag eun touseg. Pa voredem, kenta veze klevet o youhal « emaint o tond ! » Eur had eo a dreuze ar park. Eur haz-noz beb an amzer a viaoue. Neuze avad e krene ar paour kêz den hag e-noa c'hoant, evel an oll dud spontig, da lakaad ar re all da grena evelañ.

Hirio on-eus eun all, tamm gweloh. Ol leskel a ray da denna hed an noz war zoudarded all euz or bro, hag a zo dirazom en Alamagn. Pe e ouie edont eno ! Neuze ne oa ken nemed e lakaad er prizon en deiz war-lerh. Pe ne ouie ket ! Neuze n'oa ken nemed eur genaoueg, ar pez am-eus atao kredet, ar pez a ziskouezas ken fréz da houde.

— Chomit dihun, emezañ, hag atao prest da denna.

Ar bed a oa sioul war on tro. Goulou ebed e Karling. Goulou ebed e neb leh. Er hoad dirazom tamm trouz... Eo ! ahont pell, eur vloh o vlej. Eur vloh ! Me a wele em huñvre Du ha Duig... ar zaout am-oa karet... saout ar Berez ha re Gweledigou e breskin e Korn ar Gazel !

Paour kêz bioh kollet ! Den ebed d'he goro ! Paour kêz bioh ! Blejal 'a ra c'hoaz muioh. Med petra ' zo ? Dihun a ran a-grenn ! Petra ' zo ? Lavared e ve leun a zaout o vlej !

Nann ! an hekleo ! hekleo an tiez goull, hekleo ar hoajou eo a gas euz eun tu d'egile blejadenn doaniuz ar vloh kollet.

Ha koulskoude ! Koulskoude ! Pennad gal ! Saout Resevan oh en em lakaad oll da vlej ne rafent ket kement a dolompi.

Unan a zav e benn. « Evez, paotred ! emezañ, n'ho-peus ket klevet lavared : Hitler a laka e zoudarded d'en em guzad e krohenn saout evid tostaad èsoh. Emaint erru ! Ar fuzuilhou karget, prest da denna ! » Re gal ! Ha ma ve gwir ! A beb korn bremañ d'or bouzara e teu blejadennou skiltruz saout a vilierou, hag o bouderez strafuilhuz a lak da lammad or halonou ha da stor-lokad or bouzellou !

« Evez ! evez ! » eme deom al Lan Seiteg a zo ouz ar ren.

A-greiz-oll e tav ar youhadennou.

« Evez ! evez ! muioh eged biskoaz ! » eme deom al lastreugenn.

Digor eo ar skouarniou, m'henn asur deoh !

Trouz er hoad dirazom ! Tammou gwez o strakal ! Tolompi ! Aze emaint ! Eur mellad bioh a gav din gweled ken braz hag an dañvad sebezuz en em gavas eun deiz gand an Eozenn goz e Kroaz an Aber.

Ma ! dra-a-a-k ! An tennou o sutal ! Eun hanter-zod a-dreñv va hein a denn, n'eus forz penaoz, hag e dennou a dremen dre va bleo hag o dev !

Ouspenn tregont fuzuilh o-deus straket.

Ha gand eur glemmadenn hir ha doaniuz eur vloh a ya d'en em astenn e-touez ar peuri harp ennom.

Heh-unan ema hi ! Ha ni en eur denna on alan a ziroll da c'hoarzin, a dort o c'hoarzin. Eur vloh hebken he-deus greet deom kement a aon !

Hag e-pad ma c'hoarzin... ar vloh a dlee beza lazat gand kement a dennou... a zav en he sav, hag a ya da guzad d'an daoulammou er hoad, a-raog m'or-bije bet amzer da gemeroud en-dro or fuzuilhou.

Gand soudarded evel-se, penaoz e ve bet gounezet eur brezel ?

Oh en em rei da gousked, setu ma teu sonj din euz istor saout Jozef, ar seiz bioh treud a deu da zebri ar seiz bioh lard.

Daoust ha n'edom ket o tond euz a weled unan euz ar seiz bioh treud, dirollet euz a greier Hitler, o vond da zailha bremañ war ar bed evid lonka ar saout lard hag hada e peb leh ar gernez, an naon ?

Mab an Dig.

Ar brezoneg er Skol

Evid tud 'zo, ar Bleun-Brug n'eo nemed eur gouel. Ne welont ket al labour don a vez greet gantañ penn-da-benn d'ar bloaz, dreist-oil war dachenn ar Skol.

Evid ar wech kenta, abaoe ma oar eun den, om deuet a-benn da lakaad eun Urz Frered, da zistaga unan euz e izili ha da rei dezañ aotre ha galloud da vond, etre daou benn ar bloaz, euz an eil skol d'ebén, evid mad ar brezoneg. hag ar pez a zo pouezuz braz, e labour a zo harpet gand renèrèz skoliou kristen eskopti Kemper, el leh m'ema, d'ar mare, e dachenn labour.

Tro on-eus bet da houlenn digand skoliou 'zo, petra 'zoñjont euz labour or Sekretour. Oll e lavaront pegement ez int kontant euz ar henteliou hag an abadennoù a ro. Ken kontant all, emezo, eo ar vugale. Al luhskeudennou a liou a ziskouez diwar-benn Breiz, ar yez, ar Bleun-Brug hag e ziazezeur a zo dispar, hag a jom garanet don e sperojou ar vugale. Muioh a ra eur skeudenn evel-se, gand ar gerig a zo ouz he heul, eged n'eus forz peseurt prezegenn hir.

Penaoz e heller, avad, gand skeudennou komz euz or yéz. Goulennet on-eus kement-se digand ar Frer Seite.

« Netra esoh, emezañ. Diskouez a ran eul laz-kana o kana er Bleun-Brug, setu tro da gomz euz ar brezoneg er hanaouennou hag er hantikou. Goude beza diskouezet d'ar vugale savadurioù kaerra Breiz-Izel, e lavaran dezo ez eus eur savadur all, diwanet diwar spered on tud koz, kalz kaerroh c'hoaz eged tour Kreisker : Ar brezoneg an hini eo. Kompren èz a ra ar vugale, eo talvoudusoh mired en e zav ar brezoneg eged eur savadur mein, n'eus forz pegeñ kaer eo.

Méd ar pez a ra war ar vugale ar muia efed eo skeudenn banniel nevez *Santez Anna Wened*, warnañ diou frazenn vrezoneg distaget gand *On Tad Santel ar Pab* e-unan : « *Ra vo meulet kalon glan Mari — Enor da Zantez Anna, Patronez vad ar Vretoned* ». Hag e klevet a-wechou komzou evel-henn o sevel a-douez ar vugale : « Ma biskoaz kemend-all ! Ar Pab a gomz brezoneg, ha ni méz ganeom, aliez, ouz her homz !! » Pa houlennan diganto goudeze, piou a oar brezoneg, e hellit kredi e saver an dorn gand foug.

Ken plijuz all eo ive, skeudenn an *Itron C'ueff* hag he *zeir merh*, a ganas e brezoneg, e *Radio Vatican*, e *Rom*, d'ar 25 a viz Meurzh diweza. Eet eo, dre-ze, mouez Breiz dre ar béd a-béz. Ha kement-se a sko ar vugale. Kement-se a zigas c'hoant dezo da gana kantikou brezoneg evel bugale an *Itron C'ueff* e *Radio-Vatikan*.

Or sekretour, a ro ive d'ar vugale, anaoudegez war istor *Breiz*. Amañ, emezañ, an dra a zo èz-kenañ gand harp skeudennou. Ugent skeudenn dibabet mad, he setu greet eur bourmenadenn blijuz dre istor Breiz a-béz.

Méd, ar gentel vrezoneg plijusa, eo, a-dra-zur, kentel ar magnetofon, ar benveg misteriu « hag a oar tenna poltred ar vouez » !

« Araog lakad tro er mekanig eme atao ar F. Seite, e vez roet levrig konkourioù ar B. B. d'an oll vugale. Ar re-mañ a lenn asamblez ar hanaouennou hag ar rimadelloù a zo ennañ. Rimadell « *An Aotrou Sant Peran* » a blij dezo kenañ, hag istor « *An tri gaz bihan* », muioh c'hoaz. « *An dañvad Penn-gornig*, gand Mari Guillerme euz Plouescad, 8 vloaz, a laka, dalhmad, ar baotrezed da c'hoarzin, hag eun tammiñ ive da ouela, gand feuz d'an *dañvadig*. Méd mouez dudiu *Urbane Abarnou* euz Bodiliz, 12 vloaz, a ra avi d'an oll. Ne vez ket an disterra trouz er zal, keid ha ma kan ar seiz koublad euz « *Alhouez an eürus-ted* ». Ha pebez kentel gaer a gavont, ouspenn, er ganaouenn-se ! — « *Son ar boutaouer koad* », avad, ha « *Son ar kafe* » a laka buez e-touez ar baotred, kanet, ar gen'a gand *Frañsez Bizien* euz Lokournan Leon, hag an eil, gand *Guy Penn-lae* euz Kombril, 8 hag 11 vloaz.

Méd, ar souezusa tra d'ar vugale, eo klevet « *An Aotrou Sant Peran* », displeget gand eur paotrig euz « *Skol an Aod* » e *Guisseny*, hag eur verhig euz skol ar Seurezed e *Leskonil*, eiz vloaz dezo o daou. Ha pa vez goulennet diganto pehini anezo eo ar gwella, e vez beh, m'hel lavar deoh, ha tabut ha trouz !

Evid echui e vez laket ar vugale da gana brezoneg ha paket o mouezioù war ar magnetofon. En deiz all, e *Pouldreuzic*, e oa eun dudi, klevet anezo o kana kantik Itron Varia Pennorz, ken a deue an dour em daoulagad ouz o zelaou... »


Setu eul labour dispar hag dlefe beza meulet gand an oll. Eul labour dreist da gement labour a zo bet greet biskoaz war dachenn ar skol. Pa zoñjer e-neus or sekretour, greet tost da *gant kaozeadenn* a 1 h. 30, abaoe miz Du, e tost da *gant skol* ; e-neus komzet euz Breiz, ar yez, ar Bleun-Brug, an Ao. Perrot, da ouspenn *10.000 bugel*, e heller lavared e ra aze ar Bleun-Brug, eul labour hag a zo, e gwirionez, efeduz braz.

Al labour-se a gendalho gand skoazell or mignoned. Mall braz eo, avad, rei galloud, d'ar F. Seite da weled an oll skoliou hep ploaz. Evid se e ve réd kaoud daou Frer all d'e skoazella. Ne zizesperom ket da erruoud eno, araoz pell.

J. J.

KELEIER

ABADENNOU BREZONEG en itali hag e radio - vatikan



On lennerien o-deus kavet e Bleun-Brug miz Mae eun danavellig euz ar beaj greet en Itali gand an Itron C'ueff hag he merhed. Emaom o paouez reseo eur foto om laouen da lakaad dirag daoulagad on lenner en : On Tad Santel ar Pab o komz da Varivonig C'ueff hag o lavared : « Je vous bénis et je bénis la Bretagne ».

Ha n'eo ket echu hoaz gand an abadennoù brezoneg war Radio-Vatikan :

Klevet e vo, war 41 m. 21 — 31 m. 10 — 19 m. 84 ha 196 m. :

d'ar yaou, 16 a viz Mae, da 19 h. 45 ha d'ar gwener 17 a viz Mae, da 12 h. 45, eur brezegenn diwar ben Sant Erwan ha kantikou gand an Itron C'ueff hag he bugale.

D'an 30 a viz Mae, da 19 h. 45 ha d'an 31 a viz Mae, da 12 h. 45, e vo kanet **Kantik ar Baradoz** gand or henvroadezed.

eun diskouezadeg vraz war or yez, e kemper, e-doug an hanv.

E Kemper, « Musée départemental », e-kichen an Iliz-Veur, ez eus, azaleg fin miz Mae, eun diskouezadeg vraz war ar brezoneg, plijuz ha kenteliuz kenañ, gand skridoù koz ha nevez.

En diskouezadeg-se, ar Bleun-Brug e-neus ive e blaz, e-leh ma tiskouez al labour greet gantañ war dachenn ar brezoneg. Den ne dremenno dre Gemper, hep mond da weled an diskouezadeg se.

Skol-hañv ar Bleun-Brug.

Skol-hañv ar Bleun-Brug, d'ndan renèrèz an Ao. Chaloni Falc'hun, Visant Seite, Korantin Riou hag ar Frer Cyrille-Leon, a vo dalhet er bloaz-mañ, el Likès, Kemper, euz an 19 a viz Eost, d'ar 26.

Fiziañs on-eus, e raio ar skol-hañv-se, muioc'h a berz c'hoaz, eged hini Kastell-Paol warlene. Prezegeien a dalvoudegezh o-deus dija prometet dond. Er miz a zeu e rolm amañ roll ar studiadennoù.

Levriou Jos Doare.

Deuet ez eus er-mêz, daou levr nevez, e rummad levriou Jos Doare Kastell'in : « Châteaux en Bretagne » (mages de Jos Le Doaré, texte de Florian Le Roy) ha « Fontaines sacrées » (texte de P. Thomas-Lacroix) : Editions d'Art, Jos Le Doaré, Châteaulin, Finistère, 270 francs.

Ezomm ebed da veuli an daou levr-mañ, a zo euz lignez al levriou all deuet a-raog hag a anavez an oll. Unan euz al levriou-se, « Mojennoù ar Mor », gand Per Hellas, a zo bet embannet e brezoneg, gand an hevelen skeudennou. Eun nevezenti vraz eo bet kement-mañ war dachenn or yez. Ha prenet hoh eus al levr-se ?

Istor ar Bleun-Brug.

(Bleun-Brug, niverenn 99.)

Pedi a reom an Ao. L. Lok hag on lennerien da zigarezi an dizurz a zo en em zilet er pajennoù-ze. Derou an istor a zo da veza lennet pajenn 21 : « Da viz C'hwevrer 1907... Concours », ha da houde e ranker lenn ar pajenn 20.



GERIOU - KROAZ

T	R	I	S	T	
R	A	Z		E	N
E	Z	E	L		I
M	E	L	E	N	
E	D		N	A	O
N		E	N	O	

Diskoulm da gudenn an niverenn 99

A-Bien. — 1. O kreski er harz. — 2. Gand an dra-ze e vez eyet ar hafe. N'eo ket diêz. — 3. Menezioù uhella ar Frañs. — Ennañ emaoñ o chom (kemmet). — 5. An dud-se a zo tud euz ho familh. — 6. Hennez a zégas glao en hañv.

A-Zerz. — 1. Red eo ober an dra-ze d'an toullou, a-wechoù. — 2. Eur benveg da labourad er park pe el horz. Artiki. — 3. Ar re n'her greont ket a vo paour a-hed o buhez. — 5. Evid gwriad. — 6. Ar re-ze.

	1	2	3	4	5	6
1						
2						
3						
4						
5						
6						

Embannadurioù "EMGLEO BREIZ"

« FONDATION CULTURELLE BRETONNE »

Boîte Postale 17, Brest, C.C.P. 380-96 Rennes

Lexique Breton-Français et Français-Breton
(Stephan-Seite), 330 francs, franco.

L'Orthographe Universitaire de la Langue Bretonne
(Falc'hun-Dujardin), 180 francs, franco.

Komzom, Lennom, ha skrivom Brezoneg
(J. Tricoire), 280 francs, franco.

Mil Pok (Pezig-c'hoari en eun arvest, gand J. Noel),
50 francs, franco.

Seiz Pennad-Lenn, 50 francs, franco.

Mojennoù ar Mor (Pierre Hélias).
Edition Jos Le Doaré, 280 francs, franco.

Geotenn ar Werhez (Jakez Riou), 380 francs, franco.

Barzonegou (Reunan ar Moug), 195 francs, franco.

Gand Red an Dour (Roparz Broudig), 195 francs, franco.

Dasson ur Galon (Loeiz Herrieu).
evid Skolioù Bro-Wened, 330 francs, franco.

An Azennig bihan (evid ar vugale), 180 francs, franco.

Ar Roh Toull (Jakez Kerrien), 330 francs, franco.

Textes de Thèmes (Pierre Trépos).

DINDAN AR WASK

Eur Honiklig Boudedeo (Evid ar vugale).

Geriadurig Brehoneg - Galleg ha Galleg - Brehoneg
(Bernier-Mahuas).

Deskom Brezoneg (Seite-Stephan).

Bilzig (Fanch al Lay).

BLEUN-BRUG

Kenstrivadeg ar prezegèrèz, 30.000 lur a brizioù

Setu amañ danvez ar **prezegèrèz evid 1957** :

« **Muioh-mui ez a an dud diwar ar mêz. Perag ? Peseurt riskl a zo eno evid ar vro ? Penaoz mired ouz an droug-se d'en em astenn. »**

Digor eo ar genstrivadeg-mañ d'ar yaouankizou, **paotred ha merhed euz 17 vloaz da 25 vloaz.**

Réd eo deski ar brezegenn dindan eñvor, hag arabad e vo da houmañ beza hirroh eged c'hweh munut.

Peb hini en em brezanto, dirag ar jury, deiz BLEUN-BRUG e gorn-bro.

30.000 lur a brizioù a zo da hounid. An Itron a ROHAN-CHABOT he-deus kinniget 20.000 lur. Bennoz Doue dezi en ano ar BLEUN-BRUG hag al loreidi.

Evel beb ploaz, e vezo adarre eur genstrivadeg **kan ha kon-tadennou poble, digor d'an oll.**

Evid ar vugale ez eus kenstrivadegou **lenn, kana, displega, tresa, ha skriva.**

Bez ' e heller goulenn diganeom **leorig ar henstrivadegou :**

« Ty-Carré, CHATEAULIN, Finistère ».

Ar BLEUN-BRUG a vo : **d'ar 26 a viz Mae e ROSTRENEN,
d'ar 2 a viz Even e LOKRONAN,
d'ar 14 a viz Gouere e LANNILIZ.**

Lenn a reom war ar « Sentier » :

Collecte pour le Breton

La collecte pour la langue bretonne aura lieu, comme tous les ans, le **JEUDI DE L'ASCENSION**. Nous engageons maîtres et maîtresses à y faire participer leurs élèves par la vente d'insignes. L'argent recueilli servira à l'impression de livres, et à l'attribution de prix aux meilleurs élèves des cours de breton.